

YF_0057_An Anduilhenn

An Aotrou Person eus Pleiben
'N doa c'hoantaet kaoud un anduilhenn.

Diskan:
Jobig don dipig don dei la di flipig,
Don dipig don da don dei ladira.

En doa kaset e vatezh kaezh
Da glask anduilhenn war ar maez.

Pa oa kavet an anduilhenn
He-doa he lakaet 'barzh ar soubenn.

Pa oa he 'foazhet ha poazhet mat,
Ne bade den gant ar c'hwezh vat.

Pa oa he faoutet dre an hanter,
Ne bade den gant ar c'hwezh-flaer.

An Aotrou Person a grie forzh
"Taolit 'n anduilhenn 'barzh ar porzh!"

Met ki ar person a oa tost,
'Hejan e benn, ' fistoul e lost.

Diskan all:
Mestr ar bolom larikeu dondeneu
Vayanteu koko larikeu dondon.